



KANTIK

PARDONERIEN KALON JESUZ.

War ann ton : *Pitié, mon Dieu!*

Ho pet truez ! — va Doue, hor selaouet
 Evit hor bro beuzet enn he daelou ;
 Toullet he fenn hag he divrec'h chadennet
 He daoulagad e tro ouz ann envou.

DISKAN.

O kalon Jezuz !
 Kalon dibab !
 Bezit, bezit truezuz
 Ouz hor bro hag ar Pab !

Ho pet truez ! — va Doue, war eur C'halvar
 Ni wel Pi Nao, reneur braz ann iliz ;
 Seul was he boan, seul startoc'h ni a lavar :
 Bevet Pi Nao ! ha fin d'he boaniou kriz !

Ho pet truez ! — va Doue, pa deu Mari,
 Mari ho mamm d'hor bro d'en em ziskouez,
 El leac'h ne deuz nemet lann ha gwezeri,
 Bleuniou ann Env a zavo a nevez.

Ho pet truez, va Doue, ouz dallentez
Kement a bec'h, hep sonjal e reont fall !
D'ezho, hirio, sklerijen ha karantez !
Karantez vraz ! ma vint kristenien all.

Ho pet truez ! — va Doue, gant ho kalon
C'hui glevo mad goulennoù hon hini ;
Pa roit ho koad, bemdez, er gommunion,
Petra peffe da nac'h mui ouz omp-ni ?

Ho pet truez ! — Ho kalon, o va Doue,
A ziskouejot da zantez Mac'harit ;
Na feuntenn all n'euz bet kavet abaoe
Ken puill he gras d'ann dud keiz a garit.

Ho pet truez ! — va Doue, c'hui lavare :
Pa falvezo da rouantelez Frans
Beva e peoc'h, beva skeduz adarre,
Ne glasko ken feunteun a bareans.

Ho pet truez ! — va Doue, gant he sec'het
Ouz ho kalon hor bro baour a dosta ;
D'ar glanvourez skuillit ann dour a iec'het,
Ha pareet ann ene da genta !

Ho pet truez ! — va Doue, ho pet truez !
C'hui oâr ervad ez omp ho pugale !
Ouz hoc'h e sent ar maro hag ar vuez,
Hor sikourit, va Jezuz, hep dale !